

---

---

Gwerziou. T. V pièce 3

# G U E R S

VAR GUINIVELEZ

**HERRI, DUC - A - VOURDELL,**

MAP D'AN

**DUC A VERRI,**

GANET E PARIS, D'AN 29 A VIS GUENGOLO ER BLOAS 1820;

Composet gant Mær commun Lannurvan.

---

I<sup>er</sup>.

**D**EUT a clevit ar Bursudou  
E deus græt ar Brovidanc  
Celebrit e Madoberou.  
En andret ar bopl a Franc :  
 *Doue so trec'h d'an drouc-speret ,  
 Couls hirio evel gueic'hall ;  
 E vrec'h ne de quet diverret  
 E zorn ne quet eët da fall.*

2.

Ar Franc-oll e devoa tridet ,  
Pa oue grêt an union ,  
Eus a *V*erri ac e Bried  
O daou eus a c'hoad *B*ourbon ;

Gant ar c'hoant guelel anéze  
Quenderc'hel al lignez nobl,  
Dimeus a *Herri pevare*,  
Tad carantesus d'ar bopl.

3.

Eur *Verc'h*, dimeus o c'harantez  
A oa bet ar froez quenta,  
Evit assuri al lignez  
E c'hedemp ur map brema.  
Petra dal lacat esperanc,  
E yec'hed pe nerz an dud?  
An hini a re or fizianç  
So laset e creüs e vrud!

4.

D'an daousec eus a vis choevrer  
Deüs a gaon ac a c'hlac'har,  
Dre zorn milliguet ur muntrer,  
Digoustianç a barbar,  
E quichen e bried fidel  
A dirac e daoulagat  
Scoët gant ur poignard cruel  
An Duc a gouez en e c'hoad.

5.

Na perac muntrer dinatur  
Oa did caout eur sort vengeance  
A bet es poa displijadur  
Digant ar Princ, pe offanç?  
« Drouc ebet evit ma ouffenn  
» N'en deus grêt din emezan;  
» Mæs evit discarr ar vesen  
» Var ar c'hrizzien e scoan. »

( 3 )

6.

Mæs petra c'hoas, den possedet,  
A ne zoujes quet Doue,  
Ober un evelep torfet  
Eb excus na digare?  
« Ne gredan 'me an den impi  
» Nac ifern na barados  
» Quemense so mat da droubli  
» Da hirra-tout grac'het-cos. »

7.

Ar Prinç paour e creïs e anquern,  
A recommand e ene,  
Evel ma tle peb guir gristenn,  
D'e salver a de Zoue :  
« Pardon d'ar murtrer emesan  
» P'ini en deus va laset ;  
» Grac Doue dech a requetan  
» Va fried muïa caret.

8.

» Adie deoc'h va zat emesan,  
» Adie deoc'h o va Roue,  
» Deoc'hu tout e recommandan  
» Va græg a va bugale ;  
» Soignit mat va fried fidel  
» Evit ma raï blavez-mat  
» Cridi a ran e c'hell guenel  
» Un heritour ding timat. »

9.

E creïs an disesper cruel  
Eus e dud muïa caret,  
C'huec'h heur goude an taul mortel,  
Ar Prinç a zo tremenet.

Goënvét eo ar *fleurdelisen*  
 Troc'het gant ar falc'h garo  
 Mar deus chommet un tam grizzienn  
 Martese e nevez.

## 10.

Mæs, allas! ac en so moyen  
 E c'halfe an intañvez  
 Goude quement all a anquenn  
 Digac da vad e frouëz?  
 Pedit, Francisien, evit hi.  
 Distroit ouz ho crouër  
 En ebquen a ell conservi  
 Ur froezen quen dister.

## 11.

An dud honest o deus gouëlet;  
 Mæs bet eus bet ur rum-all,  
 Pere a c'hoarse e secret  
 Ous an torfêt infernal  
 A mar o d'oa queus er galon  
 Oâ balamour ma chomme  
 Un esperanc a c'hoad *Bourbon*  
 Echappet d'an torfêt-se.

## 12.

Diouto a dious ho harraich  
 Preservit, ô va Doue!  
 Ar Brinçess, cresquit e c'houraich  
 E nerz e yec'het ive!  
*C'hui a so trec'h d'an drouc speret*  
*Couls hirio evel guaichall,*  
*O prec'h ne de quet diverret,*  
*O torn ne quet eet da fall!*

## 13.

An intañvez a greis cousquet  
 E deveus bet un uvre  
 Songeal a re desi guelet  
 O tisquen dimeus an êe  
 Sant Louis, gantan ur buguel  
 Iaouanq-flamm en e guichen  
 Dreist e benn ar Roue santel  
 A zalc'he ur gurunen.

## 14.

Oc'h esperout e vo guirion  
 Ar pezh e deus uvreët  
 Ar Brinçess a sant e c'halon  
 Courachet a consolet.  
 « Nem eus aon ebet emesi  
 » Me a c'hano va buguel  
 » En despet d'an oll gassoni  
 » Eus ar muntreien cruel. »

## 15.

Caër o deus tud leun a valic  
 Ar *sperejou infernal*  
 Essa dre peb goall artifice  
 Coll ar froezen Royal  
 Essa sponta an intañvez  
 Dre ar poultr a dre an tan  
 En despet d'o fallagriez  
 Ar Brinçess ne deus grêt van.

## 16.

Evel ma c'havanc an amser  
 An oll dud fidel e Franç  
 Prosternet dirac an auter,  
 Leun a feiz a esperanc,

( 6 )

ppli an *oll gallowdec*  
r an êe ac an douar ;  
pedennou quer calonec  
ne vo quet bouzar.

17.

a vouel Sant-Micquæel an arc'hel  
Brincess e deus santet  
a taust e heur da c'henel  
Deut ama tout va merc'het,  
lasquet, emesi, an testou,  
ho hanvet gant ar Roue,  
da c'hortos c'hui va gardou,  
Deut ama en dro dime.

18.

estec goude e deus ganet  
mabic en ho Fresanç;  
a Doue ra viot meulet  
ganet eus ur map a Franç!  
rigor franç dorriou ar palæs  
it ma ello peb hini  
antreal e cambr ar Brincess  
Da velet e map ag hi.

19.

Ar Roue en doa ordrenet  
Derc'hel prest ar chano'liou  
Evit pa vize guilioudet  
Annonç ractall ar c'helou

( 7 )

Ma ve ganet un dimesell  
E ve leusquet daousec tenn  
Mæs cvit un *Duc a Vourdell*  
Uguent ac unan ouspenn.

20.

An Tennou a gommanç crosal  
Silanç! dre ruiou Paris  
Ne glefac'h den o causeal  
Peb scouarn a selaou pis :  
Mæs pa oe countet an drisec,  
Pebes transport, pebes joa!  
Mil-bennos dan *oll galloudec*  
Ur mab eo? *vive le Roi!*

21.

Commerit couraich tud fidel;  
Savet eus an noplâ goad  
Hor Princ *Herri Duc a Vourdell*  
A vo *vaiillant*, just a mad  
Douguen a rai ar gurunen  
Huel var e benn Royal  
Renta rai ar *fleurdelisen*  
Quer squidus evel gueichall.

22.

C'hui tud impi tud dinatur  
Chenchit pe o po dommaich  
Chetu ama eur c'hrouadur,  
A gabesto oc'h arraich.

Sant-Micquæel en deus discaret  
Satan er punc' infernal  
Da guever gouel Prinç an ælet  
E gauet ar mab Royal.

23.

Celebromp ar Madoberou  
E deus great ar *Brovidanç*  
Meulomp hi euse bursudou  
En andret ar bopl a Franç.  
*Doue se treac'h dan drouc speret.*  
Couls hirio evel gueichall  
E vrec'h ne deo quet diverret  
E zorn ne quet eêt da fall.

FIN.